

Klaoda :

Ar vezenn hag ar zitrouillenn

Flablenn

Greet mad en-deus Doue pep tra :
'Vid displega 'r wirionez-ma'
Tro 'r bed n'eo ket red din ober,
Er zitrouillenn he haver.

*

Eur houeriad piz a zoñje
Pegen teo eo 'r frouezenn-ze,
Ivez peger moan he zaol-penn¹,
Hag e lavare evel-henn :
« Petar 'zoñje 'ta ar Hrouer
P('edo an traou-ze oh ober ?
Ar zitrouillenn-ze, 'dra zur,
A zo gwall lakaet gand ar Fur !...
Arsa ! m'em-bije he hroget
E bleñchenn eun dervenn galed
Gwelle e ve bet, e gwirionez :
Heveleb gwez, heveleb frouez !

« Pebez gaou, Garo, n'vfe ket
Bet e kuzuill Doue galvet !...
A ! neuze – o ! netra surroh –
Pep tra a vefe bet gwelloh !
Rag, perag ar frouezenn vez²
Ha n'eo ket tevh eged va bez³,
N'ema leh ar zitrouillenn,
Hag homañ e beg ar wdezenn ?... »

Ar zoñj-ze a nehe Garo,
A yeas dindan gwezenn dero
En eur laavred : “Ne gousk ket
Neb en-deus kemend a spered !...“
Morgousket edo pa gouezas
War e fri, an hini⁴ a gignas,
Euz an dervenn eur frouezenn,
Me 'fell din lared eur vezenn.
Divuna 'reas 'n eur en em glemm,
Hag, o kas e zorn war e zremm,
E kav ar vezenn c'hoaz staget
Oh e varo, gand gwad glebiet.
E fri kignet a reas d'on den

¹ he zaol-penn : he garrenn.

² ar frouezenn vez : ar vezenn.

³ va bez : va biz.

⁴ an hini : pini, er skrid orin.

Komz e giz all hiviziken !

« O ! o ! diwada 'ra va fri. »
Emezañ, 'vond war-zu e di,
« Petra 'vefe 'ta degouezet
Ma vije warnezañ kouezed
Eur beh ponnerroh 'ged ar mez,
Evel ma'z eo ar zitrouillez !...
N'eo ket falvezet da Zoue,
Hag abeg en-doa evid-se !... »
Garo neuze, oh Her meuli
A zegouezas beteg e di.

Daoust ne gaver ket aliez
Euz an dud-se en on touez ?...
Ya, Doue a oar mad petra
A zo evidom ar gwella ;
N'En-deus greet netra heb evez,
Her gweled a reom sklêr bemdez.